

Alan an Diuzed

**Mari-Anna
ha
Yann-Loeiz**

Mari-Anna

Ar beurevez-se e tihunas abretoh c'hoaz eged boaz. Trouzouigou an noz, a zeblante dezi kleved abaoe eur pennadig, a greske hag e hortoze, gand mall, kenta bannou an deiz oh em zila, sklêrroh-sklêrra, tommoh-tomma dre garanou ar stalafiou. Abaoe eun toullad sizuniou en em gave heh-unanig en eun ti ma veve ennañ war ar zolier. Ar berhennez, erru war an oad, a veve en traoñ ; med, mervel a reas hag he bugale a glaske unan bennag all evid al lojeiz. Mari-Anna a hortoze an darvoud-se ha bemdez e wasae heh anken.

Deut e oa war he leve abaoe daou vloaz hag e oa bet degemeret en eun ti evid ar re goz. Eno e tebre he fred kreisteiz ; he hoan en he zi, ne veze ket treud med eeun rag ne oa ket eur geginerez ampart en askont d'he micher ; chom a ree neuze er gêr da urzia an ti ha da lenn beteg diwezad en noz. Gwir eo, e-pad he buhez, pe dost, he-doa labouret en eun ti-skol evel lienez-kemenerez evid ar merhed yaouank a oa eno e pañsion. Gante e veve dalhmad noz-deiz. Ne guitae ket aliez an darempredou-ze. Mond a ree gante da vale bep sul hag he buhez a dremenas evel-se heb nehamant da weled.

Bremañ, e-touez ar re goz, en em gavas heh-unan da genta ; med ne oe ket pell o tastum en-dro dezi eun toullad mignonezed rag konta a ree eur bern kaoziou ha kana poziou desket ganti er skol.

Goude ar pred e c'hoarie kartou ; dond a reas zoken da zañsal evel ar re all ; ar pezh a zegasas dezi da zoñj euz he yaouankiz tenerra er skol vihan.

Eun abardaevez, o tistrei d'ar gêr, e welas eur harr-marhadourez a-zav dirag he dor. «Daoust hag-eñ e vefe gwir?» en em houlennas souezet. Den war-dro koulskoude. Desevet, e savas d'he lojeiz hag e sellas adarre dre ar prenest.

Ar strêd a oa goullo ; kristen ebed o tremen. Debret ganti he hoan, evel kustum, e klevas trumm trouz eun alhwez o c'hoari e krogenn an nor en traoñ. Mond a reas d'ar prenest hag e welas eun aotrou oh antren en ti. Lammad a reas he halon gand ar joa ha, koulskoude, e vefe bet plijet dezi eur plah kentoh eged eur paotr. N'eus forz, peogwir, ne vefe ken heh-unan e-pad an nozveziou hir ha melkoniuz.

Chom a reas soñjuz, a-zav dirag ar prenest, pa glevas taoliou bihan, prim ouz an nor. Abaf e tigoras hag en em gavas dirag eun den na krenn na braz, a lavaras dezi, hegarad-meurbed: «Dimezell, ma digarezit, med ar perhenn e-neus komzet din diwar ho penn hag e felle din, heb ardou, ober hoh anaoudegez!» – «Antreit eta, Aotrou, hag azezit!»

An den-ze a oa erru war an oad, sur-mad ; med ne zeblante ket beza koz ; hervez e stumm, e vouez, e oa diêz lavared eun dra bennag. Asanti a reas kemer eur werennad win: «N'em-eus netra all!» eme ar plah. «Mad-tre!» emezañ, «n'evan nemed gwin hag a-wechou eur bannah jistr mad, pa gavan ; med rouez eo brenañ!»

Evet ar gwin, e savas hag e lavaras: «Trugarez deoh. Tremen a ran an nozvez-mañ en otel ha warhoaz beure e teuin gand daou zen a vicher da loja ma feadra. Kenavo, dimezell!» – «Ken warhoaz!» emezi, «ha trugarez evid ho kweladenn!»

En nozvez-se, dineh-krenn, koulskoude, ne gouskas ket dioustu. Piou e oa an aotrou-ze? A beleh e teue? Petra a ree er vuhez? Beuzet e oe memestra en eur housk n'he-doa ket anavezet abaoe pell.

Dihuni a reas gand trouz ar vicherourien o tond hag o vond dre ar skalier gand an arrebeuri. Padoud a reas al labour beteg kreisteiz ; neuze ez eas an aotrou da verenna e kêr ; pa zistroas, e lakeas an urz en e lojeiz ha, d'an abardaez, e pedas an dimezell da drinka gantañ. Eva a rejont eur werennad win euz an dibab ha debri gwestell bihan a bep seurt blaz.

Antronoz en em gavjont en trepas hag e houlenas eñ peleh e kemerfe hi he fred kreisteiz! «E ti ar re goz», emezi. «Neuze», emezañ, «ez eo ma flas, me ive!» Hag e c'hoarzas.

Resevet e oe euz ar henta gand ar renerez ha kement-se a reas plijadur dezañ. Eur vuhez nevez, eeun, sioul a groge evid an daou amezeg. En em weled a reent e-pad ar prejou ; a-wechou e choment da hoari gand ar re all ; ar re-mañ en em houlenne piou e oa an den-ze ha perag e oa ken kamarad gand Mari-Anna. Mond a ree an teodou war-raog hag eun tamm gwarizi a zave e kalon hiniennou ; med a-benn ar fin e paouezjont da guzulikad hag an aotrou a gemeras perz en abadennoù : kaniri, dañsou, muzik hag all. Ober a reas ivez anaoudegez gand eur mouller-leoriou a ouie kalz a draou. Hag e teujont da veza mignoned.

Eun devez e lavaras hemañ: «Prestig ne vin ken gwelet amañ.» – «Ha perag 'ta?» – «Abaoe eur pennad-amzer, ez eus diou blah oh hegasi ahanon. Dond a reont da azeza em hichenn ; unan a fell dezi ma zerviji; unan all troha ma hig ; plijoud a rafe deze kanna ma lienaj hag ober en-dro d'am lojeiz. Disfiziañs am-eus bet dioustu rag kredi a ran n'eo ket ma hoz krohenn a zedenn aneze davedon med, hepken ma fañsion ha ma zi!» – «Marteze», eme Yann, «e fell deze ober plijadur deoh ha beza kaloneg!» – «Ta ! ta ! ta ! anavezoud a ran ar femelezed ; kavet em-eus an tu da echui ma buhez er zioulder ; prestig e vin seiz vloaz ha pevar-ugent. Mond a rin d'eun ospital a anavezan mad; eno e vin dieub krenn; bevet a-zoare, ha diwallet euz ar hleñvejou. Petra goulenn ouspenn? »

Kement-se a reas nebeud goude hag e chomas ar re goz heb eur heneil plijuz, latennet mad, a ouie konta traou farsuz ha kana brao-meurbed. Kuzul kêr a reas eur blijadur vraz deze en eur brienti baleadennoù gand eur harr a-ratoz evid daou-ugent a dud. Mari-Anna hag heh amezegez a veze bep tro euz ar veaj na gouste ket gwall ger.

Evel-se e teujont, tamm-ha-tamm, da anavezoud ar vro a oa bremañ o hini beteg diwez o buhez, eur vuhez plijusoh-plijusa bemdez.

Tostaad a ree an diskar-amzer; an hañv a oa bet tomm grizias er bloaz-se hag an oll a oe laouen o tremen eun hanter devez war ribl eul lenn gronnet gand gwez a bep seurt. En disheol e vefe brao merenna ha diskuiza war ar yeot. Echu ar pred, e fellas d'an daou geneil ober tro ar stank dre eur wenojenn a-hed an dour. An natur he-doa kollet he nerz; eun delienn a goueze amañ du-hont; unan hepken a vefe heuliet buan gand kalz a re all.

Erru tost d'eun ouf bihan ma chome eur vagig e tistroas an wenojenn euz he hent evid sevel war eur run; stard e oa ar hrav hag ez azezjont war eur bank da gemer o alan. Ar gwel, alese, war al lenn, a oa dudiuz; en tu all, e koueze ar ribl sonn e-barz an dour; poaniusoh e vefe ar valeadenn eno. Gwech an amzer e tremene eur vag dre-dan a zegase gwagennoù bihan beteg an tu all, nepell diouzim. Eun evn-mor bennag a blave a-uz d'or pennou gand kriadennoù skiltruz.

An daou valeer ne gollent netra euz ar pez a oa diraze. A-greiz oll, e lavaras an aotrou: «Abaoe eun toullad deveziou emaom asamblez aliez a-walh ha n'ouzom netra c'hoaz an eil diwar-benn egile. Daoust hag-eñ e lavarfeh din peleh oh bet ganet?» – «Feiz! ya, eveljust; en eur vro e-leh ma vez ket komzet kalz a halleg!» – «Soñjet em-boea kement-se en askont d'ho pouez-mouez; plijoud a rafe din anavezoud eur ger brezoneg bennag ; c'hwi a zesko din, marteze?» – «Pa fello deoh!», a respontas-hi en eur hoarzin. Hag ar c'hoarz-se a reas plijadur dezañ! «Evid deski galleg ez eo bet red din mond d'ar skol...» O tistaga ar ger-ze e tislivas he dremm hag en em lakeas da grena eun disterra: «Petra a hoarvez ganeoh?» eme an den, nehed da vad. – «Ma digarezit, n'eo netra.»

– «Neuze eta», a gendalhas egile, «ez eo er skol...» Troha a reas hi ar gaoz: «Na gomzit ken din euz an dra-ze, mar plij ; eun devez bennag e kontin deoh ma buhez!» Tevel a rejont ha, goustadig, e teujont endro war-du ar harr.

Hemañ en em gave war eur hlazenn stok ouz an dour. Kalz a weturiou a oa eno. En tu all e oa eun ti-debri gand kouvidi o tond hag o vond. Eur c'hwez dedennuz a zeue alese beteg enne! «Santoud a ran krampouez!» emezañ. «Ar meuz-se a blij din. Ha c'hwi?» – «Din-me ive; gwechall ma mamm a ree

krampouez da lipad ar bizied» – «Ahanta! eom da weled!» Goulenn a rejont heb lavared ped, gand eur voutaillad jistr. Debri a rejont leiz o hov hag e oent eüruz oh azeza er harr ; an distro a oe stroñsuz war eun hent meïneg hag ar hrampouez a ziskennas buan en o bouzellou. Eur veaj eüruz, eta, nemed eun nehamant en askont d'ar ger *skol*.

Goulenn a reas-eñ diganti ha diskleria a rafe dezañ ar rag hag ar perag euz he foan-spered du-hont, war ar bank: «Deuit du-mañ warhoaz, goude merenn hag, en despet d'am rann-galon, e kontin deoh ma buhez ; evel-se e vo sioullaet ma spered!»

Buhez Mari-Anna

An deiz war-lerh, dioustu goude merenn, e tistrojont d'o zi: «Deuit du-mañ! emezi, da eva eur bannah kafe fresk, ma hellan hen ober, rag n'on ket akuit war an dra-ze!» Dond a reas mad a-walh ganti, memestra.

Azetet ouz taol ez evjont gand plijadur o zasennad kafe ha, heb gortoz, e krogas Mari-Anna gand heh istor: «Evel m'em-eus lavaret deoh, em zi ne veze komzet nemed brezoneg; ma zad a oa micherour war an heñchou ha ma mamm a laboure en ti-skol evel keginerez evid ar vugale. Abred e kasas ahanon ganti ha ma lakaas e-touez ar re vihanna, diwallet gand Janig, eur plah hegarad-meurbed. Eno e krogis da zeski galleg a-nebeudou.

Debri a reen gand ar re vrasa hag en em gavis e-kichenn eur paotrig a bevar bloaz bennag euz ar hlas bihan. Sikour a ree ahanon da droha ma hig ha ma mamm a roe dezañ an tammou gwella. Mab ar renerez an hini e oa. Plijoud a ree dezañ chom ganim e-leh mond gand e vamm a zebre heh-unan en he zi buanha-buan rag felloud a ree dezi kaoud eul lagad e pep kostez euz he skol. He gwaz ne veze ket aliez er gêr. Ofiser e oa er verdeadurez, e Brest. Tri haloñs alaouret a zouge war e vreh ; ar peza a lakae ar skolidi da estlammi pa veze e permission. Hag e vab a lamme gantañ, lorch ennañ. Neuze e tistroe da gemer e brejou en ti gand e vamm hag e dad ; hag e chomen ma-unan nemed pa vezen pedet gand ar paotrig, Loeiz e ano. Ar vignoniez-se etre an daou vugel a blijje d'an ofiser ha beb gwech ma tistroe d'ar gêr e tegase din madigou pe eur hoariell bennag. Pa veze eet kuit ez adkroge or buhez er hantin ha, tro-war-dro an ti-skol, el liorz peurvuia. Eno e oa gwez a bep seurt hag aleziou, en o hreiz bodou a roe dim en hañv flambouez, kastillez ; ar sivi ne reent ket diouer kennebeud da hortoz ar herez hag an avalou. Redeg a reem an eil war-lerh egile. Loeiz a grape er gwez da gutuill ar frouez dare ; med difennet e-noa outañ d'ober kemend-all ; ne ouien ket perag. Daou loenig a hoarie ganim : eur haz angora e vleo hir ha toupenneg hag eur hi, berr e vleo ha farsuz evel eur marmouz. C'hoari a reent ha redeg euz an eil penn d'egile er jardin. A-wechou e krape ar haz war fust eur wezenn hag e chome ar hi, Loulou, da henaoui en traoñ. A-greiz-oll e koueze ar haz warnañ ha ez adkroge an abadenn.

An amzer a dremenas evel-se beteg an deiz ma kuitaas Loeiz ar skol vihan evid mond d'eur hlas brasoh, hini ar baotred hepken, en tu all d'ar bourk. Debri a ree eno ha ne welen anezañ nemed d'an abardaez, e zah-ler war e chouk ha karget a leoriou nevez.

Debret gantañ e adverenn em hichenn ez antree er zal evid ober e zeveriou; azeza a reen an tosta posubl outañ evid gweled penaoz e laboure. E skritur a oa brao-kenañ ha nêt; hast am-boa da gaoud e oad. Kement ha tremen an amzer, e roe din leoriou leun a daolennou livet euz ar haerra a veze lakeet goude aketuz en o flas. Diskleria a ree din an istoriou skrivet warne hag ivez al labouriou e-noa greet er skol. Goude-ze, evel boaz, ez eem d'al liorz beteg koan. Hag evel-se e vezem aliez a-walh asamblez. D'am zro e teuas evidon an oad da vond da skol ar re vraz. Bremañ e hellfen ober evel Loeiz pe, neuze, e sikourfe ahanon da gompren pep tra. Kement-se a reas, eveljust, hag a-drugarez dezañ, em-eus desket lenn, skriva, konta. Stad a veze ennañ hag e poke din beb an amzer.

Eun toullad bloaveziou a dremenas evel-se. Siwaz! D'e unneg vloaz e tremenas Loeiz eur arnodenn evid mond d'al lise. Resevet e oe e-touez ar re genta. E miz here e kuitafe e famill. Laouen e oam oll med

nehet memestra beb ma tostae eur an disparti. An ofiser e-noa tremenet eun toullad deveziou ganim e-pad ar vakañsou. Ober a reas ganim baleadennou war droad, gand e wetur ha, zoken, war vor. Hegarad-meurbed e oe ganin hag e soñjen, a-wechou, e kemere ahanon evid e verh. A-benn ar fin e tegouezas deiz an disparti ; traou Loeiz a oa bet ingalet gand preder; netra ne vanke er valizenn. Mond a rejom oll d'an ti-hent-houarn ha pep hini a bokas da Loeiz, nemed e dad a gase anezañ beteg ar skol, e kêr vrasa an departamant. Eun daerenn a ruillas war ma dioujod hag ar vamm a ouelas; ma hini a reas memestra. An tad e-noa lakeet e zillad ofiser. Erfin e lohas an treñ; selled a ris outañ beteg an diweza tro-gorn; eno e welis eur mouchouer gwenn o fraoñval hag e ris memestra.

Red e oe gortoz ouspenn eur miz a-raog distro Loeiz. Gouel an Oll-zent an hini e oa ; eur houlz trist; an amzer o yennaad hag an eneou o soñjal er maro. Koulskoude kalonig Anna hag hini Loeiz a oa leun a eürusted. Adkavoud a reem al liorz ken degemeruz hag an daou gamarad, ar hi hag ar haz; med ne hoariem ket evel gwechall ; Loeiz a roe din kuzulioù diwar-benn ar skol hag e prometis dezañ labourad evid kaoud eun deskamant mad.

Antren a ris e klas e vamm, ar renerez, hag eno e oen resevet er santifikad. E keit-se, eñ a gendalhe gand e studioù el lise hag e veze dalhmad kenta euz e glas. Ha pa zistroe, e-pad ar vakañsou, e reseve ma gwella gourhemennou ; neuze e poke din en eur lavared: «Trugarez, Anna vihan!»; Anna a oa berroh eged Mari-Anna. Hag e responten: «Ya! Loulou!». Eñ a hoarze o kleved an ano-ze a oa ivez hini ar hi. War-lerh ar santifikad e fellas d'e vamm kas ahanon d'eur skol uhelloh evid kaoud eur breved, med ma mamm ne oa ket pinvidig a-walh rag ma zad a oa marvet, lazet war an hent. An Itron a zavas neuze eur hlas evid he gwella skolidi hag evel-se e teuis da zeski istor, douaroniez, jederez ha meur a dra all a blijte din.

Loeiz a skrive din ma-unan evid atiza ahanon hag e hortozen e lizerou gand mall: «Lenn kalz, Anna, eno ema an dalh!» Hag e lennen al leoriou kavet e levraoueg ar skol. Med ar vuhez-se n'helle ket kenderhel; da bevarzeg vloaz e oe red din soñjal gounid ma bara ha sikour ma mamm. Petra ober? Ar vestrez a anaveze eur fererez vrudet tro-war-dro. D'ar houlz-se e touge ar baotred rochedou gwenn hag ar merhed koefou ha gouzougennou prientet a-zoare.

Asanti a reas ar fererez-se deski din he micher rag al labour ne ree ket diouer. Hag evel-se ez anavezis penaoz en em wiske an dud pinvidig.

E-kreiz ar zal labour en em gave eun doare forn c'hweh kostez dezi e-leh ma veze tommet ar feriou a beb eil. Glaou koad a veze implijet ha kement-se a roe poan-benn. Galloud a ris derhel memestra, tamm-ha-tamm. Diou wech ar zizun ez ee ma fatronez d'eur hastell nepell diouz ar bourk, dreist-oll e-pad an hañv, pa veze an oll famill bodet eno. Chom a reen ma-unan ha pep tra a yee mad en-dro, d'he soñj. Ma arzorn a ree poan din a-wechou med ar vicher a blijte din. Paet e oan ervad ha ma mamm a oa eüruz.

Tremen a reas an amzer; gweled a reen Loeiz gwech-ha-gwech all. Kenderhel a ree da skriva din hag em-boa bet an aotre da skriva dezañ. Evid ma zeiteg vloaz e oe eur gouel bihan er skol. Mamm Loeiz a ingalas pep tra hag a lavaras d'ar skolidi ober evel don. Ugent vloaz Loeiz a oe lidet daou viz goude e-pad ar vakañsou hag an ofiser a oe karantezuz em heñver. Lorh a oa ennañ rag e vab e-noa gounezet ar plas kenta en oll danvezioù al lise. Eun dra rouez kenañ.

Eun devez e lavaras din ar fererez: «Bremañ ez anavezet mad ar vicher ; kavet em-eus evidout eur plas euz an dibab ; ya! Itron ar hastell a fell dezi kaoud dalhmad eur plah a-zoare evid lienaj an ti hag em-eus kinniget dezi kemer ahanout. Respont a ris: «Med neuze ne vin ken dieub!» – «Eo, ar zul e helli ober ar pez a fello dit; an dud-se a zo plijuz, eeun ha prest dalhmad d'ober ar vad!» Asanti a ris neuze hag e krogis dioustu gand ma labour nevez. N'em-boa tamm keuz ebed. Loeiz a oa eet d'eur skol vraz evid mond uhelloh c'hoaz. Ne welen ket anezañ ken aliez med beb gwech ma teue d'ar gêr ne veze ket pell o tegouezoud er hastell; bale a reem en alezioù hep soursial ouz den. Hag e tistroe eüruz da Bariz e-leh ma heulie kentelioù eur skol uhel evid tremen e arnodennou diweza. Resevet e oe teir gwech. An aotre e-noa bremañ da zibab an skol a blijte dezañ.

Eur zulvez e tegouezas gand eur garabinenn ha dioustu ez ejom on-daou d'al liorz evid tenna war an evned noazuz : piked, mouilhi, kegined.Laouen e oa evel eur bugel ; kemer a reas ahanon etre e zivreh hag e pokas din, evid ar wech kenta war ma muzellou.Chom a ris saouzanet, med santoud a reen eun dra bennag o redeg em horv a-bez. Hag e chomjom dilavar eur pennadig, ma fenn war e skoaz.

«Aotrou, kompren a rit bremañ ar pezh a zeuas da veza on darempredou war-lerh an taol-ze!» – «Ya! Mari-Anna, gweled a ran ervad ne hellfe den na netra distruja ho karantez!» Torcha a reas eun daerenn e korn he daoulagad. «Ha koulskoude», emezi, «freget e oe an eürusted-se!» – «Ha penaoz, eta?» – «Setu ; ma digarezit, ma ouelan gwech an amzer!» – «Ya! eveljust, Anna vihan, selaou a ran, kendalhit!»

Ahanta! kenderhel a reas da weladenni ahanon er hastell ha da vale ganin kazel-ha-kazel, zoken er bourk, a-wel d'an oll, heb mez; hag evel-se e ouezas pep hini on mignoniez.

Eur zulvez d'an abardaez, o tistrei euz eur valeadenn hir a-walh a-hed ar riñvier, ez azezjom war zichenn eur halvar koz ha, trumm, e houlennas diganin: «Anna! – ne lavare ken Mari – plijoud a rafe dit beza ma gwreg?» War an taol ne welis ken netra; ne glevis ken an disterra trouz en-dro din, nemed hini ma halon o talmi em hreiz ; disliva a ris, moarvad, rag neuz ar spont a oa war e gerhenn! «Petra a hoarvez ganit, Annaig? Kemer da amzer a-raog respont din.Santoud a rez, marteze, n'hellan ket beva pell diouzit ; ganit, ez kichenn, e fell din pleustri bremañ evid peurechui ma labouriou ha dond da veza eun den gouizieg hag enoret.Dibabet em-eus an tu d'hen ober!» – «Ya! med penaoz e raim evid beva?» – « Skiva a rin er helaouennou... rei a rin kenteliou!» – «Mad! emezi, ha me ive a labouro hag e rin en-dro dit en ti!» – «Ya, eveljust, med chom a ri ganin en ti e-leh ma labourin ; gounid a rin a-walh evid on-daou, bez assur euz an dra-ze! Lavar ya, Anna ; dimezi a rin ganin?»

Petra ober, Aotrou? N'hellen ket naha eun eürusted ken didroell hag e lavariz «ya» e-keit ha ma starde ahanon war e vruched.

Eur pennad goude e houlennis: «Med da vamm, da dad ; red e vo goulenn digante!» – «Ya, sur-mad. Ma zad, marteze, a zoñjo em studiou; med plijoud a rez dezañ ha ma mamm a raio he seiz gwella evidom!» Poked a rejom stard an eil d'egile, or halon hag or spered dizammet.

Ya! med ar peb brasa a oa c'hoaz d'ober, tostaad d'e gerent ha d'am mamm.Houmañ, souezet ha diskredig koulskoude, ne lavaraz ket nann; ne felle ket dezi ober poan din.

Yann a gomzas da genta gand e vamm a gare kalz Mari-Anna: «Gouzoud a ran e vi eüruz gand eur plah evelti; med aon am-eus ouz temz-spered da dad.Plijoud a ra dezañ an enoriou hag e reñk a zo eun dra zakr evitañ.Plijoud a ra ivez dezañ Mari-Anna med alese da veza e verh-kaer ez eus eur skoill. Ober a rin evidout, evidoh, evid hoh eürusted ar pezh a zle eur vamm ober evid he bugale.Gwelet e vo!»

Siwaz! an tad a chomas aheurtet.Evitañ e vefe eun dimezi amzere; petra a lavarfe e geneiled, ofiserien lorhuz ha bourhizien ar vro? « Kee, te da-unan! emezi, n'hellan netra ken!»

Mond a reas, kaloneg da gavoud e dad.Komz a reas dousig, izeleg evel eur bugelig! «Pa vi brasoh, pa 'z-po an droed d'ober evel eun den gwirion, e ri ar pezh a fello dit; med bremañ, me eo ar mestr hag e lavaraz nann!» Kerkent e troas e gein. Loeiz a gontas din, dre ar munud, ar pezh a oa c'hoarvezet hag e kinnigis dezañ gortoz eur bloavez c'hoaz a-raog dimezi, dieub krenn on-daou: «Nann! emezañ, n'hellan ket gortoz.Ganit e fell din beva hag ar henta ar gwella! » En noz-se ne gouskis ket kalz.

An deiz war-lerh ez adkrogis gand ma labour er hastell o soñjal ez afe Loeiz, eur wech c'hoaz, da weled e dad.

Eur beurevez, da goulz al liziri, e welis paotr an ti-post o komz gand eun toullad implijidi euz ar hastell, neuz ar spont war o dremm.Mond a ris davete evid gouzoud eun dra bennag.Med kerkent ez eas pep hini euz e gostez.Redeg a ris war-lerh paotr al liziri ha goulenn digantañ: «Petra nevez a hoarvez er

bourk, Fañch?» – «Ahanta! klevet em-eus e-noa eur paotr yaouank êsaet en em laza!» – «Piou eo?» – «N'em-eus ket gouezet; eun den klañv, moarvad!» Hag eñ kuit. Med c'hoant am-boa da houzoud ar wirionez hag o tilezel ma labour, e redis war-du ar bourk, rag-eeun d'an ti-skol. Eno e kavis archerien a harzas ouzin antren er porz. Neuze e komprenis; em hichenn, eur plah a lavaras: «Mab ar renerez-skol an hini eo, tennet gantañ eun taol fuzuill en e benn.» Koueza a ris evel maro; douget e oen beteg an apotikerez hag goude e ti ma mamm. Eno e teuis tamm-ha-tamm en-dro din ma-unan. Ma mamm a ouele doureg en eur floura ma bleo. Med me n'hellen ket gouela; chom a reen dinerz krenn hag e kouezis klañv. Evel-se e oe dihalluz din mond da interamant ma Loulou karet.

Plijoud a ree da dud ar bourk; hegarad e oa gand pep hini hag eeun en despet d'e ouiziegez. Droug a zavas en oll galonou a-eneb d'ar gerent ken didruez e-keñver o mab. Poan a reas kement-se din rag ar vamm ne oa ket kirieg euz an darvoud; a-viskoaz e oa bet madelezuz ganen. An tad, pennfollet, a roas e zilez euz ar verdeadurez hag a vevas gand e wreg en eur porzig ma prenas eno eur vag evid tremen e zeveziou hir.

Aotrou Yann, kompren a rit bremañ ma foan-spered. Ne blij e ken din chom er bourk hag e kaven ar peoh er hastell e-kreiz doujañs an oll. Rag an teodou ne baouezent ket nag ar helaouennou kennebeud. Beb noz e teue skeudenn Loulou d'am gweladenni, e gorr astennet war blañchod ar hrignol hag e benn toullet gand boled e garabinenn!

An daerou a zaillas diouz he daoulagad; difronka a ree en eun doare truezuz.

Yann, trubuillet, prest da ouela eñ e-unan, he stardas etre e zivreh hag e pokas dezi dousig. «Anna! emezañ, me ho ped, paouezit d'ober poan din; ho kalon hag ho spered a zo dizammet bremañ; red eo deoh kloza ho puhez en eur stumm all pe neuze beza dalhmad gwall-eüruz!» Sioullaad a reas ha kenderhel gand he homz!

Peb den euz ar vro a anaveze ma istor ha meur a galon a oe tenerraet. Eun devez e resevis eul lizer digand renerez lise ar merhed e penn-kêr an departamant; houmañ a anaveze ma micher. Termal a ris, en askont d'am mamm; med hi a alias ahanon da asanti. Keuz am-boa d'am heneiled er hastell ha d'an Itron a oa bet ken mad evidon; an ti nevez-se ne blij e ket dezi; petra, a zoñje, e teufen da veza? Ha koulskoude ez eo dres eno eo em-eus kavet an tu da gaoud fiziañs en eur vuhez deread.

Dalhmad en em gaven e-touez merhed yaouank, joauz, hegarad, a anaveze mad ma buhez tremenet hag a ree o zeiz gwella evid diduelli ahanon; euz ma hostez, o lienaj hag o dillad a veze dalhmad aratre. Mond a reen d'ar yaou ha d'ar zul da vale gante. Ha kement-se a badas beteg an oad, evidon, da gemer ma retred. Eur gouel a oe lidet d'ar houlz-se. Derhel a rin soñj euz al lise-ze e-pad ma buhez. Aliet gand eun amezegez e teuis goude da di ar re goz, darn yaouank c'hoaz dre ar yehed hag ar spered. Hag eno em-eus greet anaoudegez ganeoh Yann. Lavared ran Yann peogwir ho-peus anvet ahanon Anna. C'hoarzin a rejont o-daou ha pokad an eil d'egile.

Buhez Yann-Loeiz

Daou viz bennag war-lerh, e oe aozet gand an ti-kêr eur valeadenn war ribl ar mor, evid ar re goz.

Anna ha Yann ne felle ket deze c'hwita ar blijadur-ze. Mond a rejont beteg eur porzig koant gronnet gand rehell uhel a beb liou hag a beb stumm.

Abaoe ar veaj diweza e vezent gwelet aliesoh asamblez hag eveljust an teodou ne baouezent ket. Gwir eo, kenetreze e oa savet eur fiziañs hag eur vignoniez stard. En ti-debri e oe servijet deze eur geusturenn saouruz: kregin, pesked, gwestell ar vro gand gwin mad. War-lerh se ez eas pep hini euz e gostez. Yann a ginnigas sevel war eur grehenn; alese e welent ar mor beteg an dremmwel; bigi a beb seurt a valee warnañ; an evned-mor a vleje hag a spluje evid paka o bevañs. An daou valeer a azezas war ar yeot dister a-harp ouz eur roh. Hi a gaozeas da genta: «Yann, kontet em-eus deoh ma buhez; kement-

se e-neus dizammet ahanon.D'ho tro bremañ.Plijoud a rafe deoh ober memestra evidon?» –«Eveljust, n'em-eus netra da guzad!» – «Mad! med red eo din lavared deoh em-eus bevet gand dimezelled dilu o-deus desket din kalz a draou diwar-benn ar baotred; lavarit din ar wirionez krenn-ha-krak; selaou a rin pep tra!»

Anna, ma buhez a zo bet eeun a-viskoaz.Ganet on bet en eur gêriadenn, hini vrasa euz ar hanton; ma zad a oa baraer hag e vouloñjeri a ree berz en tro-war-droiu.Eur vicher galed, poaniuz ha ma herent ne felle ket deze ez afen war o roudou: «Desk mad er skol! a lavarent, hag e helli da zifenn kalz gwelloh er vuhez a zo garo evid ar re vihan.» Selaou a ris hag e labouren stard evid o flijadur ha ma hini rag ar studi a grogas ennon korv hag ene.Antren a ris el lise evid deski ar jederez hag ar skiantou.Galloud a ris kaoud eun aotreadur war an daou boent-se ha, goude, unan uhelloh c'hoaz; med n'hellis ket ober evel da vignon Loeiz a oa eur maill e pep feur.– Ruzia a reas Anna eun disterra. – Er Skol-Veur e ris anaoudegez gand eur plah yaouank speredeg-meurbed ha kreñv war ar filozofiez; gouzoud a ree ar gesianeg ha meur a dra all ne gomprenen ket ervad. Anvet e oe evel kelennerez en eul lise nepell diouz ma hini ha tamm-ha-tamm, e tommis outi hag e houlennis dimezi ganti.

Da genta ez eas mad an traou kenetrezom; santoud a reen, memestra, e oa eun doare skoill en on darempredou, dreist-oll war dachenn ar garantez.Dalhmad e veze o klask ar wirionez e pep tra hep soursial ouz on eürusted-ni.Ar pezh a blije din e oa ar vuhez pemdezieg, eeun, didroell hep klask pemp troad d'ar maout.Dond a rejom, eta, da chom digompren an eil d'egile ha pep hini a reas ar pezh a felle dezañ.Hi a brederie diwar-benn eul leor pe eur gaoz bennag ha ne lavare ger e-pad pell amzer.Me a grogas da besketa hag e kemeris eur blijadur vraz o vond abred diouz ar beure, a-hed eur riñvier, o selaou an evned o kana pe ar beizanted o c'hwitellad en o farkou.Koulskoude e kavem, gwech an amzer, eun doare d'en em zidui asamblez.A-dreñv d'an ti e oa eur jardrin vihan gand eur puñs koant.E-kichenn hemañ en em gave eur bratell; eno er gwasked, pe en disheol, e tegoueze ganim kaozeal eur pennadig; med buan e tiskampe he spered war-du glanded ar wirionez.Hag ez een kuit me ma-unan.

A-wechou e teue din da zoñj euz ma yaouankiz.Stok ouz ar vouloñjeri e veve eur martolod war e leve.Prenet e-noa eur vag evid pesketa pa zeue al lano.Mond a reen gantañ hag e teskis ober gand ar roeñvou.Abalamour da ze eo ez on deut amañ rag en tu-hont d'ar stêriou, en em gav ar mor nepell diouz kêr.A-benn ar fin ne gavis plijadur ebed o chom en ti ha pa zistroen e kaven ma gwreg dalhmad o lonka leoriou teo, skrivet bihan, peadra da gaoud poan-benn. Goulenn a ris digand eur heneil, kelenner evel don, danvez al leoriou-ze! «Skrivet int bet, emezañ, gand eur helenner koz a studie ar filozofiez hag e-noa eun doare dezañ e-unan da gompren ar vuhez.Kement a reas ma teuas e benn da goll e skiant hag e oe kavet, eun devez, war ribl ar mor ma oa en em skoet e-barz.»

Daoust hag-eñ e oe dedennet ma gwreg gand mennoziou fentuz an den-ze.Ar pezh a zo gwir eo an dramañ: Eun abardaevez, o tistrei euz ma devez pesketa, e kavis an ti goullou; klask a ris e pe korn hag ivez el liorz; den ebed.Trumm e teuas em spered buhez trist ar helenner koz hag e redis beteg ar puñs; o selled e diabarz, e welis eur horv war horre an dour.Kerkent e halvis ar bomperien, an archerien hag eur medisin, beteg gouzoud.Siwaz! maro e oa ar paour-kêz plah abaoe pell.

Hag e chomis ma-unan er vuhez oh en em houlenn hag-eñ ne oan ket eun tamm kirieg euz an darvoud-se.

«Med nann, Yann; biskoaz n'oh bet droug ganti. He spered an hini a oa klañv.Pa vez gwasket hemañ, den na netra ne harzo outañ d'ober ar pezh a fell dezañ. Loulou ma mignon, er hontrol, a ouie petra ober; dimezi ganin dioustu, a-hend-all ne oa netra; perag beva neuze?» – «Ya, eme Yann, eur blanedenn gwall druezuz evitañ!» – «Hag evidon ive; eur vuhez kollet; med red e oa din beva evid derhel beo e vemor.Trugarez deoh, Yann evid ho tanevell.»

D'an abardaez, distroet d'ar gêr, e kinnigas Anna: «Evom beb a dasennad kafe bremañ; c'hwi a raio anezañ rag ampartoh e viot, abaoe an amzer m'en em gavit hoh-unan!» – «Ya! gwir eo; desket em-eus

prienti ma meuziou ; da genta e oan e pañsion en eun ti-debri; med ar prejou a oa re fonnuz ha kement-se diou wech bemdez. Lartaad a ree; ar pezh a oa fall evid ma yehed. Neuze e tivizis ober pep tra me ma-unan; hag evel-se tamm-ha-tamm, e teuis da veva madig a-walh heb damant evid ma hrohenn!» Hag e c'hoarzas en eur vala e gafe ; an dour ar verve dija ha buan e oe prest an adverenn ha debret gand kalz a joa! «Eur paotr talvouduz emao, Yann. Setu ar pezh a ginnigan deoh: debri asamblez bemdez; c'hwi en em gargo euz ar gegin ha me euz ar hefridiou; e-pad eur zizunvez e vo ar verenn amañ hag er zizun all du-ze. Med tamm-ha-tamm e vo red deoh deski din ingali eur pred deread!» – «Mad-tre, Anna, emao a-du, krenn.

Koulskoude a-raog kregi, prometit din eun dra a-bouez ; petra a lavarfe teodou fall ar re goz bountet gand ar warizi? Koulz zo dim dimezi dioustu ha peoh d'an oll. Plijoud a rafe deoh?» Ruzia a reas Anna ha goude disliva en eur grena. Memestra e respontas, abaf: «Petra a lavaro an dud o weled eur helenner dimezi gand eur plah dister evel don?» – «Anna vihan, ha petra o-defe soñjet ar henaoueien ma vefeh deut da veza gwreg Loeiz, eun den d'eur reñk uheloh c'hoaz eged ma hini!» – «Ne oa ken netra da boueza!» – «En tu-hont da ze, emezañ, bremañ emao on-daou euz ar memez rummad, hini an dud e retred, dihalluz dezo labourad evel gwechall!» – «Ahanta, Yann, ar wirionez a zo ganeoh, asanti a ran beza ho kwreg!» – «Trugarez, Annaig, eüruz e vi ganin ha me ganit; sur on euz kement-se.» Floura a reas he bleo ha mond tostoh-tosta outi; neuze e pokas dezi dousig da genta ha startoh goude. Hi a reas memestra hag ar verenn a echuas gand eun dibenn-pred kreñv a-walh ; pasaad a reas Anna rag ne oa ket kustum.

Mond a rejont d'ober eun tammig tro dre ar strêdou, kazel-ha-kazel. Keji a rejont gand keneiled a chomas souezet ouz o gweled. Hag ar vrud a redas kerkent. Kenderhel a rejont evel diagent hag ar renerez a roas dezo he gwella gourhemennou. Divizet e oe ganti e vefe lidet an eured e ti ar re goz; pep hini a baefe e skodenn. Asanti a reas an oll, nemed unan, gwisket kêr dalhmad ha braouigou e-leiz warni. Ar warizi sur-mad; bet e oa koantig gwechall hag an teodou fall a lavare he-doa bet amourouzien a bep seurt. An eured a oe lidet en ti-kêr ha kalz a re goz en em gavas eno. Ar mêr a reas eur brezegenn verr med enoruz da hortoz an hini a rafe war-lerh ar pred.

Hemañ a oe eeun med saouruz. An Aotrou Mêr e-noa kinniget ar champagn ha Yann an dibenn-pred hervez blaz pep hini. Ar mêr a lavaras e joaiusted o weled ar re goz oh en em gleved en e gêr hag a brometas dezo baleadennou evid ar bloaz da zond. Neuze e oe distaliet ar zal; eur c'hoarier akordeoñs kustum eno a lakaas an oll da zañsal. An dañs kenta a oe greet gand ar mêr ha Mari-Anna. Yann a ginnigas e hini d'ar plah kosa euz an ti-debri. Hag e oe plijadur beteg an abardaez. En deiz war-lerh e tistroas an daou amourouz da gemer o fred diweza ha da gimidi diouz o mignoned.

Ar plah faro gand he braouigou en em gave eno hag e fellas dezi diskouez he spered fin: «Ahanta, Mari-Anna, bepred gwerh?» Houmañ a respontas en eur hoarzin: «Gwechall e oan evel-se, d'an oad ma vezeh-c'hwi o redeg war-lerh ar baotred pinvidig ha, zoken, n'eus forz piou!» Hag an oll da sklokal. E keit-se e oa Yann-Loeiz o vinhoarzin en e gorn.

Adaleg neuze e vevjont en o zi, eüruz. Gwech an amzer ez eent da vale gand o mignoned koz pe da zebri gante. C'hoant he-devoa hi, a-wechou da lavared Loulou d'he gwaz; med eun dra bennag a harze anezi ouz hen ober.